

Forom Diwan an heñchañ - 06/03/2023

Salud deoc'h,

Emañ skipailh skolaj Diwan
Jakez Riou oc'h aozañ

forom Diwan an heñchañ.

Evit-se hon eus c'hoant reiñ
digarez d'ar skolajidi 3de da
zizoleiñ ur bern micherioù a
bep seurt, dre videoioù berr.

**Ha laouen 'vefec'h da
sevel ur video berr evit
komz eus ho micher ?**



Er video berr (etre 2 ha 3 munutenn),
filmet gant ur pellgomz hezoug, vefe lâret
ganeoc'h :

- piv oc'h ? (anv, oad, micher, lec'h beviñ...)
- studioù heuliet ganeoc'h ? (peseurt bak.,
ha goude ?)
- penaos eo deuet ar mennozh d'ober ar
vicher-mañ ?
- perzhioù diaes ho labour ?
- perzhioù mat ho labour ?
- hag evit echuiñ, ur gerig kas c'hoant
d'ober ar vicher-mañ

Trugarez da zegas deomp ho video dre
wetransfer da forum.henchan@diwan.bzh
a raok an 31 a viz Genver
(anv ar video : micher / anv).

Deoc'h da c'hoût e chomo prevez ar video
ha diskouezet da skolajidi 3de Diwan
nemetken. Ne vo ket embannet ar video
war internet en un doare digor.

M'ho peus goulennoù, deuit e darempred
ganeomp : eil.derez@diwan.bzh;
02.98.21.33.69

**Ma anavezit tud a vefe laouen
da ginnig o micher, treuzkasit
ar gemennadenn-mañ !...**

